

8N2-5-013



GOUELIOU BRAZ SANT ERWAN



KANTIK AR BARADOZ



de - zuz pe - gen bras 've Pli - ja - dur an e - ne Pa vez e gras Dou - e Hag
 en e ga - ran - te Pa vez e gras Dou - e Hag en e ga - ran - te.

1. Berr 'kavan an amzer
 Hag ar poaniou dister,
 O sonjal deiz ha noz } (bis)
 E gloar ar baradoz.

2. Pa zellan en nenvo,
 Etrezeg va gwir vro,
 Nijal di a garfen
 Evel eur goulmig wenn.

3. Pa vo pred ar maro,
 Neuze me 'gimiado
 Diouz ar hig ankeniuz,
 Enebour da Jezuz.

4. Gortoz a ran gant joa
 An termen diweza:
 Mall am eus da weled
 Jezuz va gwir bried.

5. Tremen a rin al loar
 Evit pigna d'ar c'hloar;
 Dreist an heol, ar stered,
 Me a vezo douget.

6. Aet pell diouz an douar,
 Traonienn leun a c'hlac'har
 Neuze me ray eur zell
 Ouz va bro Breiz-Izel.